

2. Klenved ar vro.

Ton : *Ma c'halon a zo fraillet.*

Vardro divez ar brezel, ar brezel ken heuzuz
A zavas, en hon amzer, 'tre Bro-C'hall hag ar Pruss,
E Genev, en hospital, edo tost da vervel,
Eur paour kez soudard yaouank ganet e Breiz-Izel.

Keit ma hen doa bet yec'hed da vont var an dachen,
Hen doa stourmet kalounek, 'vel eur zoudard kristen ;
Mes, an hini oa choumet bepred stard en emgann
Gant ar riou, an dienez oue diskaret buhan.

Setu hen kouezet guall glanv, kaset d'an hospital ;
Mes eno ouz he glenved e stag eur c'hlenved all :
Deiz ha noz da Vreiz-Izel he spered a zistro,
Ha gant he galoun, siouaz ! ema *klenved ar vro.*

Guall stard eo dezhan mervel ken pell dioc'h douar Breiz,
Ha ken pell dioc'h he gerent, hag e lavar eun deiz :

« Araok mont euz ar bed-man, me 'meuz c'hoant, ha
[c'hoant braz

« Da velet da viana va zad eur vechik c'hoaz. »

Raktal e kaser kelou da dud ar zoudard kez.

Neuze pebez kalounad ! Neuze pebez enkrez !

Koulz koude eun tamm fizianz 'n ho c'haloun e talc'hont :

Marteze n'eo ket kollet .. He dad ielo du-hont...

An hent zo hir ha poaniuz : treuzi Bro-C'hall a bez ;

An tad ive zo guall goz. Mad ! mont a ra gant prez.

Dizale, a bouez poania, setu hen digouezet :

He vab a zo dirazhan... Eun druez he velet !

Pa vel ar paour kez klanvour he dad en he gichen :

« O va zad ker, emezhan ; breman 'varvin laouen ! »

— « Arabad digourachi ! a respountas an tad ;

« Arc'hant emeuz digasset ; me 'breno d'id traou mad... »

« — Traou mad ! eme ar c'hlanvour. O ne dalv ket !
[Pell zo

« An traou ar guella blazet emeuz donjer outho ; »
Hag e kouezas adarre skuiz-maró ; hag he dad
Oc'h he velet a zave an dour 'n he zaoulagad.

Ne c'houie petra d'ober, pa deuas da zonzjal
Ez oa choumet 'n he zilerc'h eun tamm bara segal,
Hag e kinnig anezhan d'he vab, 'n eur lavaret :
« Sell aman eun tamm bara græt gant da vamm garet ! »

Kerkent ha ma eo kouezet ar gomz-se 'n he skouarn,
Ar c'hlanvour, o vouz c'hoarzin, a astenn he zaouarn :
« O ! eun tamm d'in, emezhan ; rak, naoun emeuz
[brema ;
« Abaoue keit all amzer n'emeuz debret netra ! »

Goude ar begad kenta e c'hoanta kaout eun all,
Hag eun all c'hoaz... Ar c'hlanvour bete neuze ken fall
A zant ema adarre he nerz o tont en dro
Hen araok ken drouklivet a zeu dezhan liou brao.

Ha dalc'hmad e lavare, dre ma zebre eun tamm :
« C'houeka bara eo heman ! bara græt gant va mamm ! »
Bemdez, adalek neuze, ez eas var vellât ;
Ha dizale d'ar gêar e tistro gant he dad.

Enëou ar gristenien aliez zo henvel
Ouz korf ar zoudard breizad ; dare int da vervel.
Ha ne deo ket eur zouez ; rak eleiz a ziouer
Magadurez ho ene : Sakramant an Aoter.

C'hoant hoc'h euz-hu da zerc'hel hoc'h ene beo ha krenv ?
Gant ho mamm, ar guir Iliz, ema bara an Env.
Debrit outhan aliez, ha c'houi velo neuze
Pegen c'houek eo d'ar galoun, pegen mad d'an ene.
